

Mar m'he me awalc'h a studi a spered da rima  
eur pluen gane em dorn a me prest da skriva

(f° 212)

me a skrife eur reglet erve va santimant  
Chujet dan antréien en tre daou zen iaouank .

mes kent avans davantach c'houlennan arjstans  
eus ar sperejou kaera kent evid doud d'he c'homang

Da rei d'am speret an allumier pa meus an okarjion  
Da kompozi eur chanson erve va intansion .

Pa lennan em leor bihan, zo kalier ma studi  
me kav enon treo surprénabl pere a ra chagrin din

Pa lennan va flaneden skrivet sur gant va mestres  
Deus va brassa plijadur a ra din tristidiges .

Pa vezan me em jardrin mem bez kontantamant  
me a remark eur fleuren a ioa ie a brillant .

a ioa evel an diou <sup>treffot (sans tête)</sup> (de) (1) ag an eol ardant  
Pini a deu da bara ~~evel ebars~~ er firmamant .

Ones a zo eur fleuren deus a valankoni  
Antréed eo don em c'halon diez bras da c'heffassi .

Prins, an oll amouroustet, Roue an oll dud iaouank  
Uanadou dre o sillou am rento langissant .

Kenta man boe an henor va mestrez d'ho koellet,  
e voa er porchet an illis goude an offeren bred .

---

Il n'y a pas (dans le ms.) de titre .

(1). - De, entre ( ) dans le ms. ; les mots : treffot (sans tête) sont ainsi écrits dans l'interl. supérieur .

(f° 213)

Enon me o remerkas a c'hras ag a fesson  
a vizach a daoulagad ag ive a galon.

O taoulagad a vulle evel an eol ardant  
Pini a deu da bara ebars ar firmamant.

O tiou chod rus o tal goën evel eun diamant.

Petra virje ouzin - m'he man deujen d'ho karet  
Pa zeo c'houi va mestrez rouanez an oll plac'het.

O kened sur va mestrez a plij d'am santimant  
O furnez o modisti a rent va halon kontant.

Mar plich gant va doue, mar deo e vadelez  
E deufe va genet da plijout dam mestrez.

Va furnez va modisti da plijout d'he faltarzi  
Va kenta e halon kontant pa parlantün gati.

An eil goec'h mane goëlis assuri e halon  
e voa ebars an ilis bed e komunian.

e c'hober e fask kenta e mesk ar vugale  
Dar poënt - se a voa iaouank a me a voa ive.

neuze deus da zillezel va edukation  
evid dond da attretëni deus a greis va halon.

evid dond da attretëni rouanez an oll fleurioù  
eus ar gaeran fleuren a zo er jardinoù.

Onez zo eur fleuren eus a velankoni  
kaeroe'h evid flourdrilis ag ive rosmari

a mar deu dezji goëvri assuri a allan  
Naz a lakei va halon var ar plas da ranan.

(f° 214)

An eil de a vis east e lakis em speret  
Ag ive em faltarzi mond da vellet merc'het

mond da velled va mestrez rouanez va halon  
Va oll dezir er bed man va inklinatün.

362

Debonjour dec'h va mestres en de deus a hirie  
Gant eur galon barfet evel zo gane-m'he.

Gouskoude pe neur chonjan er pes zo dim' lavaret  
me a meus amzer gollet e dond do derempret.

— Sod e vec'h ma cherricher o donet da gredi  
Rag eur goal deod a deüs evid o separi.

Pa vec'h dispenet dime ker munut az ar pel  
Se ne raffe ked dime donet d'ho dilezel.

Cherjit a prepojou treitourez miliget  
Chagrin a ra darn speret pa klevan o komzo.

Pa sellan e kallier va studi vellet o prepocho.

7

Jarnton Puill. 9, Juin 1851.